

Perak deskiñ brezhoneg ?

...Sed aze ur goulenn ! Perak em eus desket ar brezhoneg. Da gentañ er goulenn e c'heller ober ar c'hemm etre «Deskiñ brezhoneg» ha «Deskiñ ar brezhoneg». Deskiñ un tamm bennak a vrezhoneg, pe deskiñ da vat, pizh, a-zevri. War ar poentig-mañ e pismigan rak n'eus ket bet fellet din chom hanter-hent, met labour ur vuhez eo : bemdez e c'hell neb a gar donaat e anaoudegezh eus ar yezh, netra nemet o lenn kalz dija paz eo gwir ez eo deuet diaes bras bremañ ober dre gomz gant ar yezh. Alese talvoudegezh vras «*Kalon Plouc'ha*» a ro an dro d'en ober e stern tud a gav plijadur vras oc'h en emgavout hag o «komuniañ» ouzh taol karantez ar yezh, ar vro, ha kement tra a denn dezho. Hor gwrizioù eo.

Ar respontoù d'ar goulenn a zo personel, an holl anezho. Dont a ra an ezhomm se diouzh un istor personel : pep hini a ra e hent hag un deiz e ra e soñj ober un dra na 'servij ket', deskiñ brezhoneg. Un ober sirius-tre eo met na denn ket d'ar bed danvezelour, setu eo divarc'het an dud. An dud tro-dro, peurliesañ, a gavo lu an dra-se, didalvoud pe digomprenus, hag evit mirout o mignoniezh ganeoc'h, a lavar ez eo un 'diduamant evel re all'. N'eo ket. Dañjerus eo komz brezhoneg, dispac'hel, rak lakaat a ra an diskred war dalvoudoù ar gevredigezh (diazezet war an arc'hant), war ensavadurioù ar Republik (unaniezh an tiriad, ur yezh hepken, hollveziadelezh (universalité) ar galleg «yezh Gwirioù Mab Den» an droc'herien-c'houzoug...

Evel gant an testenioù all eo va saviad. Kalz a draoù a zeu d'am memor gant ar goulenn-se, em istor personel o deus graet din ober anezhañ va yezh, er gêr da vihanañ. Amezeien vrezhonegerien, anvioù-lec'h karter va vakañsoù a studien war ur gartenn étât-major pa oan 10 vloaz, traoù Breizh dre vras a gaven holl prizius-kenañ adalek an oad-se : ar feunteunioù da skouer, dilhad ha koefoù ar merc'hed a felle din eurediñ ganto pa oant ken kaer !, ha neuze darvoudoù tiegezhel : lorc'hentez divent va farizianez a vamm-gozh diwar-benn ar Gêr-gapital a vroueze ac'hanon pa gave din e oa maner va zad kozh e Kerne-izel ur baradozig, ul levrigoz kozh e levraoueg vihan va zud – memes hini gant Fañchig, hini Visant Seite gant Annaïg hag Ivonig, embannet gant Ololê, pell a oa, e-pad ar brezel - , ha neuze eo bet startaet din va mennad (a gemeris kerkent ha da zek vloaz bennak, posubl eo e vefe abretoc'h) en deiz ma profas din va zad-kozh da Nedeleg, bloaz a-raok dezhañ tremen, ul levr 'Buhez ar sent' bet moulllet e 1839 uzet pajennoù ar goañv ennañ ('pad an hañv, me laka, e oa re a labour evit lenn da noz ?) ha ne oa ket bet kaset d'ober tan en oaled (evel m'eo c'hoarvezet da skouer gant Kannadig ar Galoun Zakr ha neuze bremañ, er BnF zoken, e vank kalz a niverennoù : mat e oa da c'hwezhañ a n tan, sed aze!...). Al levr-se en doa un istor varzhus he doa boemet ac'hanon. Diwezhatoc'h e verzis e oa daou ezel eus an Association Bretonne em familh e deroù an XIXvet kantved, hag an eontr kozh «Xavier» o chom war ar c'haeoù e Roazhon, kenderv va mamm-gozh, a oa «de Langlais» e anv... Pa «zeuis da Vreizh» da vat e oa marvet daou vloaz a oa met he wreg, tante Annick a brofas din «Enez ar Rod»... Ha neuze e oan deuet tamm pe damm da vezañ dizalc'hour hag e tizolois e oa bet breur henañ va zad-kozh e-barzh ar PNB kentañ... Goude-se e voe startaet c'hoazh va mennad da beurzeskiñ ar yezh gant kejadenoù izili eus «an Emsav», Paol Kalvez, Youenn Olier, Yann(-Vari) Bouëssel Dubourg, Youenn Souffes-Despré, Marsel Blanchard, Klerg ivez... ha diwezhatoc'h Youenn Troal, Yann Talbot... Kement hini a gar ar yezh zo breur din hiviziken. Chom a ran a-sav amañ gant an eñvorennoù daoust ma 'z eus re all eveljust. Tamm-ha-tamm e teuis da vezañ pezh ez on, dedennet gant kement-tra a denn d'ur vro nac'het dezhi bezañ. Ar Gwir a-enep d'ar Bed ! Bro va c'halon. Setu eta penaos e oan deut da zeskiñ ar yezh.

Trivliadel e oa betekhen. Kavout a ra din e vez trivliadel an darn vras-tre eus an dibaboù a reomp. Goude-se avat, bep dek vloaz pe war-dro, evit derc'hel gant an hent dibabet eo ret donaat an afer da lavarout eo kavout abegoù sonnec'h.

Pa oan 16 vloaz on bet skodeget pa zizolois bomm-lavar anavezet Yann-Vari Perrot «En hor yaouankiz en deus Doue fiziet amzer da zont hor Bro». Daou ster zo d'ar bomm-se. Fellet ez eus bet dezhañ lavarout e kont an Aotrou Doue war an dud yaouank evit gwellaat amzer da zont Breizh, met me 'm boa komprenet, un tammig disheñvel eo, en doa an Aotrou Doue, e-pad va bugaleaj, roet

din da gompren e oa ret din labourat evit ar vro. Setu an abeg pennañ da zeskiñ brezhoneg a oa : peogwir e kav mat an Aotrou Doue e vefe dalc'het d'ar brezhoneg e Breizh. Diwezhatoc'h em eus adlennet istor Babel er C'heneliezh : Gen 11, 6 : «*Hag e lavaras an aotrou : «sed ur bobl unvan, ur yezh unvan dezho holl, ha sed ar pezh ez int krog da ober [sevel un tour da ziraez dreist an neñv] ! Ha bremañ ne vo harzet outo netra a gement a vo o soñj ober. 7 Arsa ! Diskennomp ha luziomp duhont o yezh (...).*» Tu ez eus da gompren aze n'eo ket bolontez Doue e vije ur yezh hepken dre an douar a-bezh rak re c'halloudus e vije neuze an den, c'hwezhet gant al lorc'h oc'h en em gavout evel Doue e-unan, ha neuze e rafe forzh petra. Gant an araokaat niverek a vremañ en em gavomp adarre gant un eil Babel a ra gant ur yezh hepken, ar saozneg. N'eo ket mat.

War an dachenn relijiel c'hoazh – a zo penndalc'hel evidon – eo mat studiañ degouezh Jezuz a gomze peder yezh : arameeg er gêr, latin yezh ar romaned a zalc'he ar vro, hebraeg yezh an Testamant kozh ha gresianeg kenyezh ar mor kreizdouar er sav-heol. War ar c'halvar e oa teiryezh ar skritell «*Roue ar Juzevien*». Er Pantekost o deus resevet an ebestel donezon ar yezhoù ha sant pêr a zo bet komprenet gant tri mil den, kalz estrenien en o zouez, a oa e Jeruzalem en deiz-se «*en o yezh*». Marteze e oa eno en o zouez ivez ur soudard roman a orin brezhon ? Posubl eo. Plijout a ra din ar soñj-se. Me em befe karet bezañ eno ivez o klevout ar C'heloù Mat em yezh din-me.

Abegoù all a c'heller kavout met a eil pouez int evidon, evel dodenn an divyezhegezh abred a zo a-hervez mat-tre evit an empenn, evit meizañ doareoù disheñvel ha liesseurt-ted ar bed, evit degemer ar re all hag all. Sur a-walc'h eo gwir.

Met preder Fañchig diwar-benn ar yezh, diwar lenn S. Weil, a zo sklerijennus-tre ken e vefe ret d'am soñj mont hardizh e pep korn ar vro da embann ar pezh a oa dindan hon daoulagad ha na welemp ket gant hol lunedoù strizh : Pal an den a zo servijañ ar garantez, ar justis hag ar gened. Karout Doue zo karout E Grouadelezh hag ar yezhoù gant kement-tra a ya d'ober anezho pe ivez a zo en-dro dezho (an anvioù divoutin da skouer, anvioù ar plant, al loened, familh hag all...

Etlammus eo penaos ez a bepred war greskiñ war liesaat doareoù ar yezhoù a zo kaeroc'h diorroetoc'h eget re an henamzer (keñveriañ an hebraeg kozh gant an hini a vremañ da skouer) ha komz brezhoneg hiziv an deiz en ul ledenez holl-c'hallekaet zo ivez karout pa glaskomp krouiñ liammoù gant an hentez, 'ober kumuniezh', komuniañ en un hevelep karantezvro. Karout e nesañ ha karout Doue zo ar memestra (Mzh 22).

C'hoantaat muioc'h a justis dirak ur stad vac'hom a ya a-du gant ar brezhoneg ivez.

Hag ar gened ? Anat eo e c'heller bourrañ pa gavomp traoù brav pe vrvoc'h, kaer a-wechoù gant ar yezh. Oberenoù meur evel ar Barzhaz Breizh, War an daoulin, barzhonegoù fromus evel barzhoneg Langleiz anvet «Kerzh !» da skouer (evidon).

Dizale, bremañ eo dija, e koazho eus an hanter niver ar yezhoù e dibenn ar c'hantved, hag ar re all a vo gwall aozet war bouez un hanter dousennad anezho. Na paouraet e vo an Denelezh ! Komz brezhoneg zo stourm en abeg da gement-se holl. Evit ur bed gwelloc'h. Tepod